

March Breiz.

(130, suite)

Var ton: Salut, ô heros bras Breiz-Izel.

Deomp oll, bugale Breiz-Izel,
 An deiz a c'hloar zo eruet;
 Ni pere a voe atao fidel
 Ha trec'h d'hon oll enemiet. (2 vech.)
 Dindan hor banier caer tricolor
 En em renjomp a greiz calon;
 Bepret en Breizjaded giiirion,
 Ni vouio en difen gant enor.

(131)

Bretonet, d'ay armou! formomp batouillonou:
 Gervomp, gervomp... good courajus ruill en hor goazjou.

Breizis leal, en em unvanomp
 Da zont da zouten hor mam-bro:
 Dever sacr pepini ac'hanomp
 Eo d'e difen bete 'r mero. (2 vech.)
 Mes evit se eo ret en deiz-mâ
 En em garout da virriqen,
 Ma ranco hon adversourien,
 O clêvet ar c'hri-mâ, oll vrena:

Bretonet, d'ara armou, &c.

Ah! ma teufe dou adversourien
 Bez a dija ancounac'het
 Ez omp bet varne oll trec'hourien,
 Hac hon eus d'o brô commandet!.. (2 vech.)
 Vien, Berlin, a dle caout memor
 Eus a bresanf hon harroset;
 Ni ivez a vouio bepret
 Evelte heuilla hent ar Victor.

Bretonet, d'ay armou, &c.

(132)

Hor c'halonou a deu da dridal
 Pa zomjomp en oll victorien
 Gouezet gant ar Franç goechal
 En qement demeus a vroyou! (2 vech)
 Aboukir, Austerlitz, ha Jena,
 Eilcau, Wagram, ha Marengo,
 Bepret testeni a rento
 Eo d'ar Victor ar Franç merc'h hena.....

Bretonet, d'an arrou, &c.

Pell da c'houlou douguen ar ravach
 En brô ebet, ni en assur,
 Ne zepiromp oll evit partach
 Nemet peoc'h enorus ha sur. (2 vech)
 Mes mar teufet vit hon attaqi,
 Ni, Bretonet, a greiz calon,
 Vit hor brô, hon Religion
 Ni vo atao prest da gombatti...

Bretonet, d'an arrou, &c.

(133)

Carantez, sac'h eus hor vam-brô guer,
 Cundu ha harp hor brec'h venjus;
 Liberté! caret en peb amzer,
 Combat gant Breizis generus. (2 vech)
 Dindan da vanier leun a enor,
 Ro demp oll sicour ha difen,
 Ra varvo hofn] adversourien
 O velet hon eus bet ar victor.

Bretonet, d'an arrou, &c.

An Tadou.

Ni a zant c'hoas berri en hor c'heiz
 Eur goad nobl, pur ha generus:
 Ha, bugale vaillant a Vreiz,
 A vo atao victorius. (2 vech)
 Vel nizien d'an Arvoricanet,
 A bere e tisqennomp oll,
 Al Liberté bigen na goll,
 Rac evelte omp citoyenet.

Bretonet, d'an arrou, &c.

170

Ar Vugale .

Ni antreo ivez er brezel,
 Pa na vezo mui hor breudeur;
 Ni a gavo poultre eus o esqel,
 Hac an tress sacri eus o humeur . (2 vech)
 Var o lerc'h ne fell qet deomp beva:
 Victor pe bartaji o bez;
 Orgouill hor bezo da james (134)
 D'o venji pe ractal d'o heulix.
 D'an armou, bugaligou! qemeromp fusuilhou:
 Qerzomp, qerzomp... good courajus ruill en hor goarziou.

Eur serjant-major eus ar Republic qenta.
 A. Lédan.

(Vol. VII, p. 130-134.)
 strophes non numérotées.